

**Mennoziou Charlez Rolland**

**Charlez Rollad (Lannaeaobou 1862 - Gweliskin 1940-**

Bet skrivet e Gwerliskin, d'an 10 a viz Eost 1902.

**Taolenn**

**Da baotred stard Breiz.**

**D'an dud a Iliz.**

**Amen.**

*Dirag an drouz a raer en Breiz  
E sstrak ma halon stard em hreiz !  
Ma n'hellan anez beza kabluz,  
Teval pelloh war dud kazuz !*

*En tu all ar wirionez, ened an dreitourien,  
E tiskwezin ar Gaou em Breiz da irvien !  
War hent al Lealded e vin kavet atao ;  
Gwaz d'an Drubarderien a gouez dindan ma faot.*

*Ma mennad eo kerzed 'trezeg eur ui  
A lakaio deruz eun well eun deiz arbobl izel :  
Pa m'om dirag on choug stlapet kuit ar pezh samm  
'Deus lakaet dem warnezañ paotre o voyou kamm,  
'Vid ma n'hellfom biken gweled evel-se ;  
A veo mad hag evuruz deuz c'hwezen ar bobl kêz  
A zalhont tre 'vid se er brasa dallentez.*

*(Notenn Embann an Hirwaz : diêz-tre eo lenn ar skrid-se).*

## Da baotred stard Breiz !

*War an ton a gerfot.*

1

Sonn ar penn ! neb 'n-eus gwad ! ha bezom oll war-hed ?  
Prest din da ren deuz vo kont, eun taol-chao ! mar bez red :  
An enebour kouezet, divergont e sao c'hoaz  
Hag a garfe laked reveulzi 'sort biskoaz !

Dizorhennet bep taol kanfarted an tu-gwenn,  
A stourm, a fring, a hop ! hag a hoari o fenn !  
Daoust ha ma vezint dornet en peb votadego'  
'Deus c'hoant 'vid kement-se vont a mestr en or Bro.

Kement digarez fall 'zo mad de', kredit deoh,  
'Vid laked gwall dizurz ha bosenn en peb leh ;  
Rag ne glaskont ken tu, ken sorhenn, deiz ha noz,  
'Med gouarn war ar Bobl evel en amzer goz.

Lezom int da youhal ! Dalhom on troad er pal ?  
N'hellfont ket ken a-bell, kaer o-devo tumpal ( ? )  
Pobl Frañs sklêrijennet he-deus lavaret stard  
Rei beh d'an dud noaz ! d'ar gaouiad, d'an trubard !

Ar Republikaned, 'benn ma'h ay mad an traou  
'Or mad eo red deze disprada 'med ar Gaou :  
Gwelet sklêr en eru wech 'barz en peb doare kamm  
'Vid gelloud gand eeunder rei da beb deb e zamm.

Rag eur rumm a-viskoaz 'oar kemend a ardou  
Ma entendont beza diskarg a druajou :  
Ned a bep sort poniou a-kuit a zienez,  
Hag a oar brao en tu 'n em denn sioul er-mêz ?

'Vid tremen lost al loen 'biou genou ar re all  
Eun darn 'deus ijinet eun doare n'e' ket fall,  
Ha war digarez dond d'en em rei da Zoue ( ! )  
En em dennont kempenn deuz kargou ar vuhe'.

O micher didalvez eo drailla paterio' :  
Kousked o hensorted war goz kaoziou goullou ;  
Eren an dud dister, oll dindan o lezenn,  
Gand lavariou kpntrol d'o buhez penn-da-benn.

Dibabet gand Doue ( ! ), ar Zent ( ! ) hag an êlez ( ! )  
Goloet deuz traoñ- kreh gand broz ar zantelez ( !? ),  
Kristen deuz tud ken flour ma soñjfe 'n em diwall  
M'o-deus eur perz iskiz ! war gorre ar re all ;

Gwalleur amañ d'ar re a zislar o homzou ?  
Barnet 'vefont gante abred d'an Iverniou !?  
C'hoaz e vint fourgaset kement ha ken bihan,  
Ma rankont bale sioul, pe ober korvig-moan !

D'o stal eo red kredi heb gweled na kompren ;  
Senti hep krozmoli war eeun d'o gourhemen ;  
Chom dall, mud ha bouzar a gorv hag a spered ;  
Mond da heul 'vel eul loen, pe gredi, pe rit ket ?!

'Vid kenderhel ar bed en eun hevelep stad,

Eo e sao ar re-mañ kalz skoliou, kredit mad ;  
Leh e vez klasket ober deuz paotr ha deuz paotrez  
Eur pezh kristen diod ! klufan pe bigotez !

Rag micher beleien, meneh, leanezed,  
'Zo deski d'ar re all ar pezh na gredont ket ;  
Rag seul-vui ma kredon an dud bicherezoù  
'Vint êzet da stleja dre o fri er poullou !

Peb doare divalo deuz deuz o ferz 'vez mad :  
Ar haerra traou, barnet, pa vint ket deuz o grad ?  
Pa fazi ket ar Pab, kredit deoh, hini d'o zro,  
'Deus urz en e ano da ober kement 'zo !

Ma ne zimezont ket 'en-deo 'med 'vid beza  
Dishual da skrapad ha kaoud ar peb gwella !  
Ze n'harz ket deuz eun darn da gemer plijadur  
Ha da zarempredi meur a blah koant ha fur (!)

## II

O galloud, eur wech c'hoaz, 'zo divent ha dispar !  
Mistri fall de' beza en Neñv ha war zouar ;  
De' om korv hag ene, ne dalv ket lavared nann.  
Adaleg ma vem bet bete ma'h em ahann !

O halon 'zo distag deuz mad ar bed paour-mañ.  
Ha 'veleknte karfent distum oll anezañ :  
An oll draou de' 'zo mad, ed, amann ha kig-sall...  
Ha flemont diganem o c'hoari mouchig-dall ?!

Datumit da gas de' pezh a gerfot d'o zi,  
Biken gwenneg ne deu deuz o ferz d'hoh hini :  
Poagnit oll heb ehan, c'hwezit an dour, ar gwad !  
Hag hini diwar ho koust er heit-se 'ray chervad !

Ya ! d'an dud a Iliz kasit a bep sort traou ?  
Magit an dud santel evel moh lard en o hraou (!)  
Gante 'mañ an alhwez a zigor dor an Neñv (?)  
Ha ma ne baeit ket e chomfoh pell a-dreñv.

Kasit ! kasit atao ! peurluignit de' o yalh ?  
Biken ne vint kleved o lared deo a-walh :  
Red eo kaoud brahellou 'benn derhel en e blom  
Stal kement dizeme 'zo dindan lezenn Rom ;

O danvez 'h a d'o heul 'barz ar hoentchou braz,  
Leh e reont koñwerz d'her kreski mih c'hoaz ;  
Dre n'o-deus na bugel, heritour, na mignon,  
E talhont da vernia bep taol madou eston !

Pa n'o-deus evel dom bugale da vaga,  
Na tad na mamm war hent, na trubuilh gand netra ;  
Pa'h om oll o kas de' na sort 'deu war e giz,  
Sklêr-mad o-deus eun tu eur huz spont hag iskiz !

Ar boan hag al labour atao d'ar memez rumm ?  
En-pad ma mañ e benn o vernia, o tastum !  
Ha c'hoaz ne fell ket de' sikour paea tamm gle  
A rank pep hini gwirion d'e Vro ha d'e gontre.

Dastum an oll vadou 'vid kaoud eun nerz dispar !  
Da zerhel ar re all dindan o zreid, war var !  
Setu eno, tud kêz stad ar beorien iskiz !  
Kuzet dindan mantell Mamm Zantel an Iliz.

Estlammet gand abeg deuz heveleb stad,  
Gouarnamant Bro Frañs a reas eul lezenn vad,  
Da reiza o breuriez, da blennaad o doare,  
Ha gweled sklêr en madou peorien ken a-zoare. (!?)

Ha kerkent garm ha trouz ! ha kounnar en o hreiz !  
Evel pa ve an tan en pevar horn a Vreiz.  
Arabad eo stoka ar biz deuz o gwiriou,  
Dindan boan da veza daonet a-bennadou

Paotred o lien groñj a zañs, ha skrign o dent !  
Gwasoh 'vid diaoulien, tamm heñvel ken deuz sent :  
Nemed dre nerz, emeze na blegfont d'al lezenn !  
Setu an oll skwer-vad demeuz o feiz kristen !...

Koulskoude neb den eeun ha ped den a feson  
A houlenñ 'vo laket pep tra en e rezon ;  
Èngali ar re-mañ 'vo gwall diêz atao :  
Med red e vo korda<sup>1</sup> ! pe 'vezo jabadao !?

### III

'Barz er chabistr trizeg deuz an Ebesteled  
Sant Paol a lavarez 'vel-henn d'ar Romaned :  
« Peb den mad ha gwirion 'gle beza en peb bro  
Doujet er penn kenta d'an oll lezennou 'zo. »

Med ar re-mañ harpet gand tud gweñv, diskiant,  
Padet mad da youhal ! mezvet a win-arhant !  
'Ra kant mil foul kaer, deuz Sant Paol na zent all !  
Dreist-oll leh 'ouzont mad 'n-eus c'hoaz nemed tud fall !...

Ar wall-gredenn hirie en bro ar Vretoned  
A zegas dem memor demeuz ar Chouated,  
Hag eur vez eo gweled e chomfe Breiz karet  
Keid-all en dallentez war-lerh Broiou ar Bed !

Soñjit en dienez, er baourentez iskiz !  
N'eo bet gwechall on zud dindan tud a Iliz,  
Pa oa an deog o ren ! an Iñkizision !  
An esklavaj dre oll 'n-eus ken 'med anken a vrezel !

A-hoant on-meum-ni c'hoaz da zistrei war on hiz ?  
Pa 'mañ ar Frañs a-bez o klask dem ar frankiz ?  
Ar gwir frankiz leal, en galleg *Liberté* !  
A chom da virviken *gante* d'an gazell ye<sup>2</sup> ! ?

Daoust ha ni 'vo barnet da chom atao war-lerh,  
'Vel gwir genaoueien da lipad ar zah-kerh !  
'Vel tud gwer hag abaf ;'leh mond war an a-raog  
Gand poelder ha kalon ! da zivenn on zamm krog<sup>3</sup>.

---

<sup>1</sup> korda: plega.

<sup>2</sup> d'an gazell ye : dindan kazell ar hezeg.

<sup>3</sup> on zamm krog : or gwiriou.

Petra 'meum da hortoz a-berz brini lontreg ?  
'Zo mil nao hant vloaz 'zo war o hlud o prezeg ;  
Ragacherien gazuz o vralla o hloh faout ( ! )  
'Lar sklêr : « Degasit dem ? N'om mad nemed da gaoud ! »

Ha ne welit-hu ket he moh o 'n em stoka  
'Vid kaoud kisti grilllet deuz an tan d'ar re-ma' ?  
O debr brao dirazoh eur wech 'vint deut er-mêz ?  
Hag a hoarz goap en kuz ( ! ) deuz ho sempladurez.

'Welit ket deuz talvoud da zerhel ho skolio',  
'Vid na hellfom biken lenn sklêr en o harto' ?  
Digorit ho spered ! sellit mad en-dro deoh !  
Hag e welfot eo toud ar bilig en peb leh ?

Rag daoust de' ober skol 'vid netra aliez  
E reont deoh paea ker ho lezoregez<sup>4</sup>,  
O tid en pep stumm all da zuna deoh ho kwad ;  
Al labour 'raer 'vid mann 'vo kalz re ger dalhmad.

Hirie, kenvroiz ker, 'zo dre oll neventi',  
Ha kement 'wel eun tamm hirroh 'vid beg e fri,  
'Zo skuiz o weled ar bed 'n e zav dre vitrako' ( ! )  
Ma houler 'vo desket kaerroh traou er skolio'.

Penn an dud a skiant 'zo torret gand kaozo' !  
Ha n'eus 'med an dud simpl da vond ken war o zro :  
N'eo ket gras d'o haoziou p'eo ne despet deze  
E meum hirie en Frañs kemend a liberte ?...

Peb gwir dad, 'me' kalz tud, a glevfe kaoud frankiz  
Da zeski e vogel 'vel ma karo d'e hiz ?....  
Se n'eo ket gwir atao ; rag tad ebed n'en-deus  
Ar perz-sod da laked e vab war an hent treuz.

An den ne vo biken re gelennet er gwir,  
Ha Gouarnamant Frañs 'glee derhel stard d'e her<sup>5</sup> :  
Mouez ar Bobl 'n-eus laret mond distag d'ar pal krenn<sup>6</sup> !  
Ha nikun 'barz en Frañs n'hell mond dreist al Lezenn !!

Piou 'h a dreist koulskoude ? pere 'stourm ar muia ?  
N'eo ket ar seurezed, kredit, ar er wasa ?  
Kement rumm aneze 'deus pleget d'al Lzenn  
N'int bet tamm aňgajet na fourgouset gand den ;

Ar re dorre ar siell, an enebourien vraz,  
Eo ar rummou 'meum bet dirakom a-viskoaz !  
An dreillourien sourret ! paotred an drapo gwenn.  
Markizen, baroned, menh ha beleien !!

An daou rumm-tud teñval 'deus 'tao de' 'n em harpa  
Hag a garfe gweled ar bobl en em drailla !  
'Zo en kuz o voustra, stummet gante o hlik  
'Vid gelloud deuz dindan mouga ar Republik :

---

<sup>4</sup> lezoregez : digasted.

<sup>5</sup> her : hir, er skrid orin (evid rima).

<sup>6</sup> d'ar pal krenn : penn-da-benn.

« An avel 'zo a-du, emezo, da wentad  
Ha da lakaad tangwall eo ingal pesort koad ( ?)  
Pa n'om 'vid dond a-benn *outi* dre votadeg  
Gand arhant a *ruz-fall*, a hell beza barreg ? »

Kerkent ar stal 'n e zav, roet de' an urzou  
Dre oll d'ar seurezed da chom er hoantchou ;  
D'ar re 'oa bet eet kuit 'vid douja d'al lezenn.  
Gret de' dond war o hiz !... Red eo mond d'ar pal krenn !

Hag en-dreg pep kouent, dre an nerz kemeret !  
N'eus nemed kontezed, beleien, baroned ( !)  
Oh isa ar bobl kêz ! war an dud a lezenn,  
Ar babouz 'n o genou ! tamm heñvel deuz kristen !

A daoliou baz-dota hag a daoliou boutez !  
Eo e fell de' hirie sevel an Gristenez !  
Ha riñsa paoziou-kambr war benn soudarded kêz !...  
Ar Bed oll 'zo mantret ! deuz ket braz santelez !...

N'eus ket pell 'oa ranket kas soudarded a-leiz.  
Da rei eur gentel vad d'ar Chinoazed direiz :  
Ma ne garom diwall 'vo red kaoud ar Chinoa  
Da zond amañ d'e dro da zeski dem beva ( !?)

#### IV

Liberte ! Liberte ! a wahont sort biskoaz !  
Daoust pe sort liberte ar foeltr a glaskont c'hoaz ?  
An hini da beurdrei ar bed war an tu gin ?  
Da laked ar bobl dindan o glin !?

Liberte da vouga koñsiañs ar re all !  
Da gas ar bed a-dreñv, evel ma oa gwechall ?  
Da vaga kasoni dibenn koz kredennou,  
Na chomont ken 'n o zav dirag ar skiantchou ?

Liberte da hweza brezeliou niveruz !  
Dond c'hoaz da venniga lahadegou spontuz !  
Da lakaad ar vinell d'ar houer a-nevez flamm ?  
Da droha komz ar re 'ziskuill o daore kamm ?

Birviken ken ! m'hen tou !... hag e houlont petra ?  
Liberte da zerhel ar Gaou noazuz 'n e za' ?  
Gwall fentuz evelkent ! eo kleved eur seurt tud,  
O houlenn liberte d'o zro diwar o hlud !

Med o stal a blen-fond<sup>7</sup> ! o dalh ! o c'haont ! o le !  
'Zo krenn en kontrol faet d'ar ger benniget se ??  
Liberte de' hepken ; med d'ar re all foeltr tamm :  
Peoh ha boued d'ar Hliked<sup>8</sup> da vnd dre an hent kamm !

Liberte da zispenn ar Republikaned,  
'Z treemn mil diod oa paea kanfarted !  
Honnez n'eo ket ives 'benn nebeud a amzer,  
Rag mouez ar bobl 'lar de' : beva deuz o micher.

O stal a zo barnet ! gand oll boblou ar bed,  
A houl ma labouro kement den a zebr boued !  
Rag n'eus den rediet da zrasta e gorv paour  
Da bourvei deze magadurez hag aour !

Eun den, peurgounnaret ! o-deus distaget krenn  
Treemn hep paea ken na gwiriou na tas-penn :  
Ali vad da laeron ! da vond warne a-vern ;  
Ma na vez den d'o harz 'vo yennet ar hoz Lern !?

Mar degouez reveulzi evel emaint o klask,  
N'eo ket war goug ar bobl e stardo ken an nask :  
E-barz en où amzer neb a houlenn kordenn  
Deuz e houg e-unan 'ray sur al lagadenn !?

Gwechall pa oent Mistri o houarn on tadou,  
Gwaz d'ar re a stourm tamm d'o gourhemennou ;  
Barnet e vijent prest d'ar poaniou euzusa ?  
An disterra ger-treuz, d'an toud da zisheolia.

Hag hirie pa houlom lealded 'vid an oll  
E yudont 'vel pa ve ar bed o vond da goll !  
Liberte ! emeze da zalla bugale !  
Ni houlenn kemend all da sklêrijenna 'ne'.

---

<sup>7</sup> a blen-fond : penn-da-benn.

<sup>8</sup> : d'ar hloaregeled.

Daoust e peleh emañ, liberte, mamm ha tad  
Rank kas o faotrezed d'o skoliou de' dalhmad ?  
Dreist-oll el leh n'eus c'hoaz nemed leanezed ?...  
Ni 'houlenn kreñv ma vo dre oll skolerezed !?

Eur rumm bennag, ni 'oa evid golo e dech,  
A lar 'vel al Louarn pa oa tapet er pech :  
« Ma leuskit da vond kuit ne dapin ken a yer ! »  
Hag e chomfom kousket war geriou ken dister ?

Int ne glaskont frankiz 'med 'vite oh-unan,  
Leh ni 'glask anezañ d'an oll gwitibunan ;  
Med ni 'lare n'o biken gwir frankiz tre ma vo  
Paeet leanezed, beleien, gand ar vro ?

'Benn ma hall mad an traou gand ar gwir Republik  
E ranko mond d'an traoñ 'pad kement 'zo er hlik ;  
D'an traoñ ! Lezenn Falloux ; d'an traoñ ! ar saeou du !  
D'an traoñ ! kement treitour 'zo c'hoaz demeuz o zu !...

Ne'o ekt red kaoud eur zae gand eur werhed fentuz !  
Goud ober doueou ( !) beva n'eus stad noazuz !  
'Vid kelenn ar bugel war an hent mad ha fur  
A houlenn da genta on oberou da stur ?

Ni 'gred da Zoue, ha koulz hag hini ni 'oar,  
Heb heuill o arveou<sup>9</sup> om dezañ ken tost kar,  
Hag eun tammig tostoh, ma vefe sellet piz,  
Pe anzañ meum neuze eun Doue gwall iskiz !

Evid ma plij dezañ ar re 'vir e Lezenn  
Hag a zalh an tosta da heuill e hourhemennou,  
Emaint eur gwall flipad war-lerh ar bobl izel  
Pe eo faoz ar hartou, ha kleuz an Aviel.

Ha m'on krog da ober war ze eul leor bihan,  
Ma lennidi anezañ ne gollfont ket o foan,  
Leh eo displeget sklêr an daolenn penn-da-benn,  
War Doue hag an Dud, ar Feiz a bep Kredenn.

Ne zaelin ket 'ta fetezi war gement-se ;  
'Velkent a-raog kuitaad gand nerz e prouvin de' !  
Emaint hag e vefont, hag a-viskoaz int bet,  
Eneb Lezenn Doue ! eneb Lezenn ar Bed

---

<sup>9</sup> arveou : ?



## D'an dud a iliz

« Hini ar paour-kêz Krist 'oa re zempl evidoh,  
Ma oa red deoh kroui treo' sotoh pe zotoh,  
Da denna on arhant bep taol war ar bed-mañ  
Rag n'ho-peut foeltr doue na diaoul nemetañ !

C'hwi 'lar en em gared, na gerit den ebed ;  
Tad na mamm, na pried, na bugel pa 'peut ket ( ? )  
Renta 'r mad 'vid ar fall, gouzañv ha pardoni :  
C'hwi 'zo feulz ! vañjañsuz ! ha leun a gasoni !

« Rentit 'ta da Sezar ar pezh 'zo da Sezar ? »  
« C'hwil stumm eneb dezañ dre oll eun nerz dispar ! »  
« Ma lezenn, 'me Jezuz, eo hini an doujañs ! »  
Me 'wel oh dirollet ! prest da skuill gwad en Frañs !

An oll dud, emedog, 'zo ingal rag Doue,  
Ha c'hwi 'ra eun dibab brao braz war o gorre :  
Beza 'peut kroaziou stên evid yalh verr ar paour.  
D'ar pinvidig lorchuz, re arhant ha re aour !

Jezuz, gwisket dister, 'oa en-tal ar beorien :  
C'hwi, kaer ha lugernuz ! gand an dud a voyen :  
Ken aliez ma vez votadegou en Frañs,  
C'hwi 'vez feuz ho kwasa oh harpa an Noblañs.

« Na stoui ket da hlin dirag traou vên ar bed »  
C'hwi 'ra dirag sent koad, dislivet, preñvedet  
« Labourit ! kreskit oll ! ha leungnit an douar !  
Ma rafem evelдох, ar bed a ve war var !

Hag evel-se bep taol, a-eneb penn-da-benn :  
Nahet ho kwir Doue ! karantez 'vid kristen !  
Rediet da anzao 'dalv mann ho kevridi,  
Hag emaoher er sta-se 'vid beza dizoursi.

(Notenn el leor ortin : Lennit ouspenn chabistr XXIII deuz Aviel Sant Vaze, an hini na gomzont kammed en ho sarmoniou).

Gwir dever peb den yah eo dougen frouez e wezenn !  
Ha c'hwi en gwir dud lor 'ra eneb eul le krenn !  
Stourm deuz nerz ar galon ! nah an enor kaerra !  
Hadet en gwad an Oll gand Krouer ar bed-ma' !!

Daoust petore furnez ha pe sort karante  
« Hellfe gwrizienni en kalon bugale,  
Tud souret, dizemez, greet dilez a bep tra, (Notenn el leor orin : 'Vid eur gwall hepken.)  
Ne reont ket zoken o deveriou kenta.

Ar Frañs a houlenn tud ? Dimezet 'ta d'ho tro :  
Heullit ar wir Lezenn, hag ar zae en bloto' !  
Kalz gwelloh 'yel' an traou, en pep stumm, en peb leh.  
Doue n'eus tamm ezomm ho kwerhded diganeoh ?

Hoh-unan e larit e-neus greet mad pep tra :  
Neuze n'oh ket krouet da chom d'ober netra ?  
'Vid ma sao kaer an ed e-barz er parkeier,  
Ma talh ar Bed da gerz, n'eo ket gras d'ho pater !...

Kalz a zoug ar zae-ze a zo skuiz dindanni ;  
Rag hepti, c'hwi 'oar mad, e heller 'n em zalvi ?

Ha gonid kerkoulz all fiziañs or bugale  
Hag o helenn gwelldoh war hent kaer ar vuhe' !

Tre vo daousort skoliou, disheñvel en pep tra,  
En eur memez broad, en beh deuz o gwasa,  
O klask gonid spered ha kalon an den kêz,  
Ne erruo biken ar gwir unvaniez ?

Ar peoh paduz amañ, ar gwir entantamant,  
Ne reno entrezom 'med dre an deskamant ;  
Ha tra ma vo urz da drei en gin penn ar bugel  
« Kendaho kasoni 'trezom bete mervel.

Klaskit 'ta, evel dom mammenn ar gwir vuhe' !

Se n'harzo ket ouzoh da veza tud a fe' :  
Ar gwir lezenn kristen 'lar dond d'en em harpa  
Hag e karer Doue 'n eur gar an nesa.

Med eun huñvre ken kaerne erruo ket c'hoaz ( ? )  
Rag c'hwi 'dorro kentoh evid plega, siwaz !  
Bountet gand tud lorhuz ( ! ) a oar md evelдох  
Penaoz eru wech maro ne vezer ket kalz gwelldoh. ( ? )

Med daoust d'ar rumm-ze da gredoud da foeltr sort  
O brasa stad e vez gwelet ar bed-mañ tord,  
'Vid yenna êzetoh ar bern pladenneien ( ? )  
A gouez dindan ho pao ( ! ) hag a gred d'ho lezenn.

Ar re-ze koulz ha ni, 'oar mad êleh emañ  
An dizanaoudegez, gouli braz ar bed-mañ :  
« Ar Bastill, emeze, oa diskaret gand poan !  
Med sotj ar bob kêz goueze ket ken buan !?

Ya ! yta 'vo beleien, frered ha seurezed  
O vaga dallentez e vo gwaderezed ;  
Krigerien all 'veldoh o stigma o lien,  
'Vel a ra kevnid louz da dapoud ar helien !

Rag d'ho heul 'vo biken 'med gevier, fals-soñjou !  
Istoriou kemmesket da drei ar sperejou !  
Da harz ar skiantchou da zond war ar bale !  
Da zihentchi bro Frañs diwar ar wirione' !!

Hoh oll nerz, eur wech c'hoaz, 'zo en deñvalijenn,  
Leh 'teu ho kaoziou fur da goueza er boultrenn.  
C'hwi 'zo tre 'vel eun ti, nerzuz e vogerio'.  
Ne chomo den e-barz, ma ve lezet disto ( !? )

« Senti deuz ho komziou, lezel hoh oberou ? »  
Eur seurt lavar hepken a zispenn ho rojou :  
Rag se 'lar sklêr d'an oll emaoth war an hent fall !  
Hag ez eo ho tever touelli ar re all ? »

## Amen

### VI

Groom fae, kenvroiz, war o hoz kaoziou flour,  
'Ha gand o oberou ken buan gand an dour ;  
Rag petra dalv prezeg madelezd'ar re all  
Mar chomit hoh-unan dalhmad war an hent fall ?

Ne dalv ket sorhenn an dud a gaoziou mad  
Ma ne glasker an tu da gaerraad de' o stad ?  
Pa 'neus 'med al labour hag an unvaniez  
Da lakaad 'vel breudeur eun deiz ar poblou kêz !

Iskignad<sup>10</sup> eur hlañvour hep klask dond d'her gwellaad  
'Zi laked eur palastr war gorre eur harr goad !  
Ha maga dallentez gand mantell ar vertu  
'Zo bodenni poaniou ha dizurz a bep tu.

A-benn yac'haad an den deuz e dechou amañ  
E renko da genta gweled sklêr dirakañ,  
Hag ar gwir sklêrijenn a zo er skiantchou  
Ha nann er burzudou nag ar falskredennou.

Pa vem sklêrijennet war hent ar Wirione',  
N'on anavefom gwelloh an eil hag egile ;  
Pa welfom oll a-bez om kotieg d'on gwall-stad !  
Buan gand karantez ni 'deuy de' 'n em dostaad ;

Hentchet gand ar furnez, neuze braz ha bihan  
Z teuy de 'n em harpa dre oll gwitibunan ;  
Hag eun deiz 'vel breudeur, gand peoh ha lealded !  
Ni 'vo war an Douar er brava evrusted !!.

\*

Hogen, kenvroiz ker, Gouarnamant ar Frañs,  
Ne glask 'med an hent-se, ker leun a esperañs !  
Hag e chomfom pelloh da enebi deuz se ,  
A-du gand ar higer ! ha ni ar paour-kêz loe'<sup>11</sup> !?

Neuz eo red anzaou om sod-mad da staga !  
Ha ne dleom beza skoazellet war netra ;  
Rag ar re n'int ket skuiz o tougen an treto<sup>12</sup> (!)  
A ranko c'hoaz da heul dastum ar hoz tacho' !!

Ar Frañs eo ar henta deuz oll Broiou ar Bed !  
O klask gwellaad doare ar poblou hualet !  
Hag a-benn ma kerzo pobl Frañs yah ha didrouz  
'Ranko beza skubet ar gwiad-kevnid louz !?

Dirag ar Sklêrijenn a laosk eun nerz dispar !  
An oll vasklou teñval a gouezo prest heb mar ?  
Hag an neb a stourmo pelloh deuz kerz ar bed,  
En-kreiz ar gorventenn a vezo bruzunet !

An Neñv a zalh a-du gand ar re 'n em zikour ;

---

<sup>10</sup> Iskignad ; heskina.

<sup>11</sup> loe' : loen. (leue).

<sup>12</sup> treto : an harneziou.

A-reuzeudig 'oe 'tao e vrasa enebour.

« An niver 'ra lezenn ! ». « Mouez ar bobl, mouez Doue ! »

« Spered ar Bobl o kerz eo he spred ive( ! »

A-benn ma 'n eur gavo ar Spered-se da ren  
Sikour plenaad an hent eo dever peb gwir den ;  
Hag eur wech ma veom oll unanet en hent mad,  
Ni 'zanto dorn Doue o rei dem e vennad !!.